


**b**remann

miz C'hwevrer 2006 - niverenn 292 - 4 euro

# Klikañ war ar brezhoneg

Ur prof evidoc'h !





### Taolen

## Fiskal Thorgal !

Laouen e vo skipailhoù **Bremañ** ha Bannoù-Heol da brofañ ul levr bannoù-treset **Thorgal** d'an dek kourmanter nevez kentañ !

Savet gant Jean Van Hamme (ar rumad XIII) ha treset gant Grzegorz Rosinski, **Thorgal** en deus graet berzh bras. Un degouezh dispar eo e vefe bet laketaet **An tri den kozh a Vro-Aran** hag **Arakna** e brezhoneg gant Tudual Audic ha Bannoù-Heol, gant skozell Kuzul-rannvro Breizh hag Ofis ar Brezhoneg.

Evit koumanant : 40 euro pe 48 euro (skozell) da gas da : **Bremañ**, 25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon. Pgr : 02 99 38 75 83.

## AMZER NEVEZ

### Stajoù sonerezh

**12 a viz Meurzh**  
Kourioñs diatonek : Jacques Beauchamp  
Korrez e koad : Sylvain Barou  
Digor (1 digor) : Erwan Beranger  
Korrez ar Dour

### 21<sup>st</sup> Staj Etrebroadel

**12 a viz Gouere**  
Akordioñs : Alain Pennec  
Fleñt-treuz e koad : Jean-Michel Veillon  
Bombard : Philippe Janvier  
Binioù bras : Jean-Luc Le Moign  
Telenn gelliek : Cormac De Barra  
Gitar : Soig Sibeni, Edmund Boyd  
Viololoñs : Pierick Lemou  
Dafis : Naig Raviard

**Amzer Nevez**  
Soe, 56270 Plañvour  
Pgr : 02 97 86 32 08  
www.amzervez.org

**Renerez Bremañ** : Lena Louarn • **Skipailh** : Olliv ar Moign, Ivan Kadored, Miro Latimer • **Koumanant** : Marie-Louise Troaded  
**Luchskudenn** : Lena Louarn, Solenn Georgeault, Miro Latimer, Anne-Edith Polivet, Jean-Luc Le Moign, Maripol Gourret, Evelyne Guyomard, Radio Keme, A'ha, UGB, Stur, OAB, OF • **Tredadennoù** : Nono, Malo, Tudu  
**Ar pennadoù embannet ne engouestlont nemet ar re o deus o skrivet** : Koumanant bloaz : 40 euro • Skozell adalek 48 euro • Estren 48 euro  
**Bremañ**, 25 straed Pierre Martin - 35000 ROAZHON - BREIZH - Pgr : 02 99 38 75 83 - Pfr : 02 99 63 82 28 - breman@wanadoo.fr  
Skridaozerezh - Pgr : 02 23 20 62 28 - lizhin@breman.org • Niverenn CPAP 62574 • Lechienn : www.breman.org  
Moulet e Moulterezh al Lisou • ROAZHON Breizh - Filmoù gant ikkon • maketenn miz C'hwевrer 2006 gant Lena Louarn ha Miro Latimer

## Profoù 2005

Yves Mervin, Roger Bizien, Yves Tymen, Yann-Jord Nonan, Lomig Basser an Dren, Pierre-Yves Gromellon, Patrick Isambert, Jean-Louis Bars, von Abiven, Mikael Audic, Marie-Louise Troaded, Sylvain Bahuaud, Bernez Donnard, Noel Peyr, Catherine Le Moine, Alain Pieters, Alan Bouvet, Jean-Charles Caudal, Jean-Mai Drapier, Annaig ar Gars, Christian Le Goff, Yann-Lug Kerommes, Oest Hello, Françoise Le Saux, Gérard Guen, Trieri Madeg, Jacqueline Fanniere, Patrick Cadorel, Yann-Erwann Allain, Arnaud Viez, Loig Lual, Marie-Louise Heydon, Loiez Kleac'h, Mikael an Eskop, Jean-Yves Perrot, Jil Lehart, Hubert Guilherm, Stefan Bian, Didier Caraes, Jakez Derouet, Jakez Kerjean, Daniel ar Gevell, Loiez Lullien, Yves Rezeau, Hélène Rivière, Fulup Rozec, Yann-Ber Salau, Paskal Tabuteau, Michel Toupin, Etienne de Monneon, Charles Linares, Yann-Erwan an Dean, Ifig Remond, Jacky Even, Yvon Elouet, Lionel Urbain, Loig Orhand, Mathieu Le Baut, Jean-Yves Le Goff, Fulup Travers, Sylvain Berhaut, Joël Capitaine, Elizabeth Coir, Rieg Delagere, Erwann Denez, Herve Huon, Paol Kerisit, Gildas ar Bihan, Pierre Quentel, Romuald Texier, Yann-Fañch Guillouezic, Reun Touleec, Gérard Merel, Fañch Jestin, Jef Gedez, Bernez Audic, Jean Miniou, Annaig Kervella, Loik Chapel, Marie-Paule Le Neue, Philippe Le Fer, Youenn Brus, Marie-Thérèse Gomy, Kristian Brissou, Mikael Rouby, Francis Gohin, Francine Leon, Manuel Biamini, Guy Thoumelin, Pér-Youn Belan, Pierre Gato, Lucien Abgrall, Jenovefa Boulbrha, Thierry Gauthier, Christine Le Menn, Jakez Merel, Gwenaelle Deschavanne, Jean-Claude Le Thomas, Mona Maze-Baudet, Yann-Loiez Kabell, Alan Gicquel, Patrick Girard, Lucien Husse, Jean-Yves Le Roy, Roger Lecuyer, Mari Lubrano-ar Rouz, Korvigelloù an Drouzig, Yann-Ber d'Haese, Bernez Kadored, Youenn ar C'heur, Yann-Varch' Cochet, Renée Frappin, Marie-Madeleine Toudic, Jean-Michel Fitamant, Patrice Colic, Ronan an Henaff, Ti Degemer Kerampuilh, Jean-François Peden, Olivier Kalarnou, Augustin Bossard, Gilles Le Roux, D.J.C. Davies.

**1 192 euro a zo bet degemeret er bloaz-mañ.** Trugarez adarre d'hol lennerien feal ha d'hor c'houmanterien nevez zo fellet dezho reiñ harp deomp evit kas war-raok ar magazin miziek. Tu zo deoc'h lenn keleier berr-ha-berr war lec'hienn **Bremañ**, ha bep Lun kreisteiz war **Bremañ Ivez**. Mont a ra war-raok bepred ar c'helaouiñ e Breizh gant krouidigezh **Ya!**, bet loreet e Prizioù France 3 2005. Chañs vat d'an holl re al labour evit kelaouiñ e brezhoneg.

**Lena Louarn Renerez**



**P. 4**  
**Kendiviz da zont diwar-benn brezhoneg ha stlenneg.**



**P. 14**  
**Gwagnennoù nevez a vo roet d'ar radioù gant ar CSA.**



**P. 15**  
**Prizioù 2005 France 3 Ovest a zo bet roet e Sant-Maloù.**



**P. 16**  
**Studiañ ar festoù-noz en deus graet Olivier Goré.**

## Emennadennoù



**Sevenadur ar Vro e Bro-Roazhon**  
Etre ar 1<sup>st</sup> hag an 12 a viz C'hwевrer e vo aozet gouel "Sevenadur ar Vro" gant Kelc'h Keltiek Roazhon. Diskouezadegoù, kendivizoù, stalioù-labour, baleadennoù a bep seurt a vo kinniget diwar-benn perzhioù sevenadurel Breizh. Yezhoù, sone-rezh, dafis, c'hoariva, sportoù, broderezh, prezegenoù ha divizoù a vo tu da anavezout gwelloc'h e-kerzh ar gouel.  
Evit gouzout hiroc'h : www.sevenadurvro.org

**5<sup>th</sup> Aux Danses des Lices**  
D'ar Sul 26 a viz C'hwевrer e vo aozet gant Dastum, La Bouëze ha Skeudenn Bro-Roazhon ar fest-deiz "Aux Danses des Lices", e koc'hu Martenet. Tem ar bloaz-mañ : "an dañsoù-c'hoari, dañsoù dud ha c'hoari en dafis". Klevet e vo Baron-Anneix, Jean-Yves ha Patrick Bardouil, Kanerhog, Ivan Rajalu, Le Doujet-Chatron...  
Etre 2030 ha 6330 goulde-kreisteiz, 6 euro (digoust evit ar vugale dindan 14 vloaz). Evit gouzout hiroc'h : 02 99 30 06 87 (Skeudenn Bro-Roazhon).

**Brezhoneg er gêr**  
**Emgav e Plougerne**  
Gant skipailh Divskouarn ha Ti ar Vro - Bro-Leon e vo aozet adarre un emgav evit ar re a fell dezho kaozael brezhoneg gant o bugale, a ra c'hoazh pe da gredont ket ober... Un devezh eskenn war an danvez-se a vo aozet neuz d'ar Gwener 17 a viz C'hwевrer, da 7 eur, e Magour Tamm-ha-tamm Plougerne. Bouded hag evajoù, kontilloù, fourchetzezioù, a vo da zegas.  
Evit gouzout hiroc'h : Ti ar Vro - Bro-Leon, pgr : 02 98 83 30 41. Divskouarn : http://divskouarn.blog-spirit.com.

**Staj arbennik e Roazhon**  
War ar yezh komzet ouz ar vugale (gerioù karantez, gerioù d'ar babig hag all...), Sadorn 11 a viz C'hwевrer e vo aozet ar brezhoneg Skol an Emsav, e Roazhon, etre pe ha se. Gant Herve ar Bihan.

**Titouroù : Anne Broussot, kenurzhierz.**  
Evit gouzout hiroc'h : 02 99 38 75 83.  
http://perso.wanadoo.fr/skol.an.emsav/.

### Stummadur DABU e brezhoneg

Kinnig a ra An Oaled, kreizenn vrezhonek Treglonoù hag UBAPAR ur staj DABU-BAFA (lodenn diazez) etre an 19 hag ar 26 a viz C'hwевrer 2006 e Treglonoù. Un diplom "Yaouankiz ha Sportoù" an hini eo evit dont da vezañ buhezour er c'hreizennoù vakañsoù pe duñdi. Adalek 17 vloaz e c'heller lakaat e anv.  
Evit gouzout hiroc'h : 02 98 04 17 15  
pe www.anoaled.com. Evit enklavañ : 02 97 45 47 14  
pe www.ubapar.org

### Stummadurioù Skol an Emsav

Prantadoù stummañ a vo kinniget gant Pol brezhoneg Skol an Emsav. Etre an 20 hag ar 24 a viz C'hwевrer, liveoù 2 ha 3. Ur sizhunvezh evit al liveoù 0 hag 1 etre al Lun 3 hag ar Gwener 7 a viz Ebrel. 35 eur-vezh kentel a vo. Ar stummadur-se, micherel (500 euro) pe hiniennel (200 euro), a c'hell bezañ skozellet gant keñfoù e an embregerezhioù ha strollerezhioù. Un dibenn-sizhun stummadur a vo ivez e Pariz d'ar 25 ha 26 a viz Meurzh e Ti ar Vro. Un all a vo e Plañvour e Amzer Nevez, d'ar 15 ha 16 a viz Ebrel (holli liveoù).  
Evit gouzout hiroc'h :  
Pol brezhoneg Skol an Emsav, 25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon. Pgr : 02 99 38 75 83. Postel : sae.bzh@wanadoo.fr.

### Oferennoù brezhonek

Presbital Landreger a gemm da lennerien Bremañ e vo eus oferennoù brezhonek en deiziadoù da heul : Sul 26 a viz C'hwевrer e Priel (17e30), Sul 26 a viz Meurzh e Landreger (17e30), Sul 30 a viz Ebrel e Vini-c'hi (17e30), Gwener 19 a viz Mae e Vini-c'hi (8e), Sul 21 a viz Mae e Vini-c'hi (8e), Sul 28 a viz Mae e Langoat (18e30), Sul 26 a viz Mezheven e Priel (18e30).  
Evit gouzout hiroc'h : Presbital Landreger, pgr : 02 96 92 30 51. Pfr : 02 96 92 92 46.

### Kig ha faltazi

Ur pezh-c'hoari e brezhoneg skrivet, leurennet ha c'hoarlet gant ar strollad Barzhannoff. E Roazhon, d'ar Yaou 9 a viz C'hwевrer da 8e45 noz, e Ti-karter Keryann, evit Sevenadur ar Vro. 6 euro, 4 euro evit studieren, tud dilabour, digoust evit ar vugale. E brezhoneg e vo an abaden, met ar re ne gomzont ket ar yezh hag an deraouidi a zefe kavout o gwalc'h eno.



### Stummañ ar gelennerien

Ur staj emstummañ ha stummañ a vo aozet gant Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion (KEAV), Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg (UGB), Skol An Emsav (SAE) hag an Amzer Nevez d'ar 4 ha d'ar 5 a viz Meurzh 2006, en Amzer Nevez e Plañvour. Digor eo d'an holl re a gelenn brezhoneg pe e brezhoneg forzh peseurt live e vefe, ha d'an holl vrezhonegerion ampart a-walc'h dija war ar yezh hag a zo en sel da gelenn brezhoneg. Kinniget e vo hanter-hanter abadennoù da studiañ brezhoneg doc'h hag abadennoù a gelenneriozezh. Evit gouzout hiroc'h : KEAV, 22 hent Moulouenn, 29000 Kemper. Postel : keav@wanadoo.fr.

### Stajoù gant Stumdi

Tri staj a vo aozet gant Stumdi, pep a dem disheñvel dezho.  
Etre an 29 a viz Mae hag an 2 a viz Even, en Enez-Eusa. Ober anaoudegezh gant Enez-Eusa e-pad ur sizhunvezh (noz ha deiz)... e brezhoneg evel just ! Tri live.  
Etre an 3 hag ar 7 a viz Gouere, e Landerne : "K'an ar yezhoù". Da bep hini da zibab e zanvez : brezhoneg, kembraeg, iwerzhoneg. Tri live.

Etre ar 17 hag an 21 a viz Gouere, e Pont-Skorff. Ur staj e gwenedeg... evit ar re o deus c'hoant da anavezout gwelloc'h ar rannyez-mañ pe he deskin. Digor d'ar re a oar brezhoneg mat pe mat a-walc'h. Dapu live.  
Evit gouzout hiroc'h : Stumdi, Maner Kerandren, BP 311, 29500 Landerne. Pgr : 02 98 21 39 94.  
Postel : bzh.stumdi@wanadoo.fr. Stajoù all a vez kinniget a-heb ar bloaz gant Stumdi.

### Kinnig labour

Klask a zo war-lerc'h kenwerzhourien gant pe hep micherezh evit kornôb-bro 22, 29, 35, 44, 56. Ratozh : Diorren ekonomikel ha sevenadurel en embregerezhioù bihan hag etre e Breizh. Brezhoneg dre dret, aotreblienñ, pellgomzer hezoug.  
Kas CV ha liher emginnig da : Le Matelou Patrick, 22 straed Lamm Vez, 29360 Klisat-Karnodeo.

### Stummadur e Kelenn

Emañ Diwan o tuta stajidi evit miz Gwengolo 2006. Bac +3, brezhoneg komzet ha skrivet. Stummadur "kelenn ar skolioù" e Kemper. Ur stummadur "en em varrekaat war ar brezhoneg" e c'hell bezañ kinniget ivez d'an danvez-stajidi.  
Kement ha gouzout hiroc'h : Diwan, Rann ar C'helenner, 7A Sant-Erme, BP 147, 29111 Landerne Cedex. Pgr : 02 98 21 34 95.

# Logod ha brezhonegerien

**Diaes ober hepto hiziv an deiz. Daoust dezho bezañ binvioù teknikel-tre, talvoudus e c'hellont bezañ war ar pemdez, war tachennoù a bep seurt. Er burev, el labouradeg, en atant, er skol kenkouz hag er gêr. Divinet hoc'h eus ez eus kaoz amañ eus urzhiaer... Hag ur benveg evit diorren hor yezh eo ivez ? Ya, eme Ofis ar Brezhoneg, a aozo ur c'hendiviz d'an 11 a viz Meurzh, e Skolaj Diwan Gwened.**



E Kreizenn Datar Sevenadur Keltiek Gwened e vo aozet ar c'hendiviz aozet gant Fulup Travers (poltrered). Arouzias eo al lec'h rak evit menañ, dielloù, diorren ha furchal en diaz dielloù, he deus Marjol Gouret (a-glez) lakaet e brezhoneg ar meziantoù ar-raozh. Ur skouer lefis eus ar pezh a c'heller sevel gant binvioù ar stlenneg, en hor yezh.

Fulup Travers, labourat a rit evit servij termenadurezh an Ofis, TermBret, a aozo c'hendiviz "Teknologiezhioù nevez ha brezhoneg". Perak kinnig seurt darvoud ?

Mañ ar pezh zo bet graet dija war an tachennoù-se ha lakaet an dud da gejañ zo bet ar pezh pennañ an devezh. Darempredin a ra an Ofis metoù an teknologiezhioù nevez ingal. Lec'hiennoù internet ha meziantoù zo bet troet ganeomp. Tro hon eus bet alies da genlabourat gant brezhonegerien a gas seurt traoù da benn ivez, kevredigezhioù pe tud o-unan.

**Piv a vo gwelet neuze d'an 11 a viz Meurzh e Gwened ?**

Philippe Basciano-ar Gall eus an Drouizig, Tangi ar Menn eus Stur, Christian Rogel, a labour kalz war Wikipedia, an holloueziadur digoust, Jan-Mai Drapier, bet troet Linux gantañ ha bet o reiñ dorn evit treiñ Opera pe levrioù war ar stlenneg, Marjol Gouret, troet ganti binvioù evit reanblañ skridoù. Pep hini a ginnigo e

labour, ar palioù en doa hag an diaesterioù en deus bet. C'hoant hon eus e chomfe pleustrek ar gaoz. Pouezus eo e vefe diskouezet peseurt labour zo bet graet, evit chom hep ober memes labour div wech. Gwelet e vo ivez ar pezh a ra diouer hag a vefe mat kaout.

**Ul labour ispisial eo treiñ meziantoù e brezhoneg ?**

D'am meno eo mat meizout e vez troet binvioù da gentañ. N'eo ket treiñ evit treiñ met evit ma rafe tud gante, da lavaret eo tud a vicher koulz ha bugale... Mat eo kaout ur c'heriaoueg a vo kavet a veziant da veziant, hag a vo resis a-walc'h hag aes da gompren. Arabat d'ar yezh bezañ re luziet : ma rank an implijerien strivañ re evit kompren e raint gant an doareoù saoznek pe galleg kenkouz all. Mat e vo kenurzhiañ labour an holl war an dachenn-se evit bezañ an evedusañ ar gwellañ. C'hoant hon eus e vefe an Ofis ul lec'h eskemm war an holl tachennoù-se.

**Peseurt sell en deus an Ofis war an teknologiezhioù nevez-se ?**

Ur benveg strategel eo ar stlenneg evit dazont ar yezh d'hor meno. Aesoc'h e vo a-wechoù lakaat traoù e brezhoneg war-eeun war ar Genrouedad. Wikipedia da skouer, an holloueziadur digoust, a vefe koustus-kenañ da lakaat war baper. Ouzhpenn-se eo liammet ar stlenneg ouzha a bep seurt teknologiezhioù a reer ganto war ar pemdez. Tu a vefe da ginnig ar pezh a vez war skrammoù hor pellgomzerioù hezoug e brezhoneg, pe an titouroù a bep seurt a vez lennet war hor skinweleroù... Dre hent ar stlenneg e c'heller tizhout leun a dachennoù.

**Komzoù dastumet gant M.L.**

Meziant : logiciel.  
Stlenneg : informatique.  
Wikipedia : holloueziadur liesyezhek digoust. Tu zo, ur wech enskrivet, da ginnig penadoù a-benn klokaat al lec'hien. <http://br.wikipedia.org>.

# Prof an Drouizig

**Un tammig tevoc'h eo niverenn-mañ ho kelaouenn, ne gav ket deoc'h ? Reizh eo... ur prof zo enni ! Kinniget e vez war pladenn an Drouizig meziantoù talvoudus bet troet e brezhoneg... Ma n'eus urzhiaer ebet ganeoc'h, e kavot tud tro-dro deoc'h a vo laouen da gaoz ar bladenn, a dra sur !**



Philippe Basciano-ar Gall (a-zehoù) o oa deuet da ginnig labour an Drouizig e Kreizenn Dizolo-pell brezhoneg Skol an Emmas e Roazhon.



**E penn an Drouizig oc'h-c'hw, Philippe Basciano-ar Gall. Abaoe pell zo ho poa c'hoant da strollañ ar meziantoù bet troet ganeoc'h ?**

E gwirionez e oa bet ar mennozh-se gant Ofis ar Brezhoneg da gentañ. Blez zo tamm-pe-damm e oa bet raktreset gant Katalaned ha Kembreiz treiñ OpenOffice, ur meziant digoust evit al labour burev. Ul labour a-bouez eo rak implijet e vez muioù-c'hw OpenOffice gant a bep seurt aozadurioù. Ennañ e kaver binvioù a bep seurt evit bizskrivañ, konterezh, sevel lec'hiennoù internet... Soñjet o deus tud an Ofis e vefe brav kinnig ar meziante-se d'ar vrezhonegerien. Troet eo bet neuze gant o skoazell ha kinniget da gentañ war lec'hien an Drouizig.

**Perak sevel ur bladenn ?**

Soñjet hon eus da gentañ en dud n'emañ ket an ADSL ganto. Hir e c'hell bezañ evito pellgargañ meziantoù dre al lec'hien. Met a-benn ar fin gant ar bladenn-se e c'heller derec'hel etre hon daouarn ur roud fetis eus al labour bet kaset war-raok.

**Penaos hoc'h eus dibabet ar meziantoù ?**

Ar re implijet ar muiañ hon eus dibabet da gentañ : Firefox (evit kantren war ar Genrouedad), ThunderBird (evit kas ha resev posteloù), OpenOffice... Ouzhpenn-

net hon eus ivez un toullad c'hoarioù. Plijout a reont kalz d'an dud war a seblant !

**Met mont a raio ar meziantoù kinniget war ar bladenn war wellaat...**


Ya, ar stummoù kavet war ar bladenn zo bet gwelliaet c'hoazh. Met ar bladenn a zo ivez un doare da bediñ ar vrezhonegerien da vont ingal war lec'hien an Drouizig goude-se. Bep miz e kinnigomp stummoù nevesañ ar meziantoù, e brezhoneg. Ma ne ginnigomp ket an doareoù diwezhañ d'ar vrezhonegerien, e raint gant ar stummoù saoznek pe galleg. Ul labour hir eo, met eus ar re bouezusañ.

**Komzoù dastumet gant M.L.**

Evit gouzout hiroc'h : [www.drouizig.org](http://www.drouizig.org).  
Tu zo da c'houlen ar bladenn war-eeun war lec'hien an Drouizig. Mod all ne chom ken nemet so klavier brezhonek ! (L'ajo eun an tamm).

## Geriaouegoù da bellgargañ

Ober a rit ingal gant geriaouegoù bihan Ofis ar Brezhoneg ? Meur a hini zo bet embannet diwar-benn danvezioù liesseurt : an dihad, an dafar burev, ar sonerezh, ar c'hiri-tan, ar pesked... Bez' e c'hellit pellgargañ anezho digoust war lec'hien Ofis ar Brezhoneg. Tu zo da gavout geriaouegoù chomet diembann war baper zoken. Hini an hent-houarn pe ar c'hell-touseg da skouer... A-benn nebeud e kavot ur c'heriaoueg diaz war ar stlenneg. Ur c'hant ger bennak a vo kinniget, evel "postel" pe "meziant".  
Evit gouzout hiroc'h : <http://ofis-bzh.org>.



# Digor ar Geriadur.com



**Ur pal resis en deus Tangi ar Menn. Dont a-benn, gant ar stlenneg, da ginnig binvioù talvoudus-tre evit implij ar brezhoneg. Un troer a fell dezhañ sevel a-benn 2008... Met evit tizhout ar pal-se en deus savet binvioù all a servijo evit an troer. En o zouez Geriadur.com, a c'hellot ober gantañ adalek miz Meurzh.**

**U** r gwir marc'h labour eo Tangi ar Menn. Diaes eo ijinañ ar c'hementad labour hag amzer bet lakaet gantañ en e raktres. Aboae pell e lak brezhoneg hag urzhia-taer da glotañ. Savet en deus "Stur" (strol-lad urzhiaer) e 1995. Difazi 99, Kuzhig, ar pal lennoù lodod zo anavezet gant ar brezhoneg marteze. Ledanaet implij ar Genarvad, ha setu savet gant Stur ar brezhoneg fest-noz.net, alliamm.com, urzhiaer.com ha me oar me.

**REÏN KORF D'AR RAKTRES**  
Stallet eo Stur e Sant-Brieg ; un adti zo gant ar gevredigezh e Karaez. Peadra da sevel daou bost a vez goulennet gant Stur a-benn krouiñ an troer evit 2008. Skoazelloù zo bet gant Kuzul-rannvro Breizh, Renerzh rannvroel an aferioù sevenadurel (DraC) ha kuzulioù-departamant Penn-ar-Bed, ar Mor-Bihan hag Aodoù-an-Arvor. "Tud a-youl vat a bep seurt o sikour ac'hanomp evit ar raktres-se ivez" eme Dangi. Evit diskouez ha lakaat war wel e labour en deus soñjet e oa mat diskouez en un doare pleustrek da belec'h e oa o vont. Pleustrek kalet en deus Tangi ar Menn hag e skoazellerien war tri benveg, abaoe bloaz hanter. Ur c'horpus skridoù, un diel-

fenner eradurezh ha Geriadur.com. Hemañ diwezhañ a vo tu d'ober gantañ adalek miz Meurzh.

### OUZHPENN UR GERIADUR

"Gant un urzhiaer e c'heller kinnig muioc'h a ditouroù eget war baper, en un doare kalz marc'hadmatoc'h pa rank al labour bezañ klokaet pe reizhet" eme Dangi. "Se eo an dra a bouez : en un nebeud eliennoù e c'heller nevesat ha pinvidikaat an diaz gerioù. Roete vo d'ar meziant elfennoù diazez ur ger, daoust ha benel pe gourel eo pe un anv den da skouer, ha graet e vo ar c'hemmadurioù gant ar meziant e-unan". Rak ouzhpenn troidigezh galleg-brezhoneg ur ger a vo tu da gavout. Holl sterioù anavezet ha dastumet ur ger a vo kinniget, dre tem. Da skouer : "debrin" zo ur verb a denn koulz d'ar gimezh (houarn debret gant ar merg) ha d'an ekonomiezh (un embregerezh debret gant unan all). An holl c'herioù a vo kinniget ivez gant skouerioù diazez o implij ha gant frazennoù skouer... hag ar c'hemmadurioù a rank bezañ graet neuze. Tamm-ha-tamm e vo ouzhpennet skeudennoù ha sonioù (doare distagañ boutin ar ger). Gant Geriadur.com e vo gwelet ivez pinvidigezh ar rannyezhoù, pa

vo lakaet e penn ar bajenn ar ger ar muñh implijet, e vo kavet da heul an holl re zo bet dastumet. Hag en o c'hichen, ur gartennig eus Breizh da resisaat lec'h o implij. "Tu vo diwar-se, reiñ ar blaz-mañ-blaz d'un destenn vrezhonek en ur ziwall mat ouz ar gerioù dibabet" eme Dangi. "Ur geriadur heñvelsteroù eo war ar memes tro" emezhañ. Tu a vo da gavout ivez deiziad ar roud skrivet koshañ eus ar ger-mañ-ger. Binvioù talvoudus all a vo gant Geriadur.com : lakit un deiziad pe ur sifr bennak hag e vo lakaet dre skrid. Lakit anv ur gumun bennak hag e vo roet ar c'hod-post deoc'h.

### UR BENVEG A YELO WAR BINVIDIKAAT

"Tu zo da lâret e vo tost klok ar geriadur-se, digoust ha digor d'an holl, rak ar sistem diazez zo bet krouet hag aes-kenañ e vo da nevesaat ha da glokaat". Da lavaret eo : ma vank ur ger, eo peogwir n'eo ket bet plantet e-barzh c'hoazh ! Ur benveg dispar evit ar re a bled gant ar yezh war ar pemdez, ar re zo oc'h ober anaoudegezh (en-dro) ganti... Hag un diaz eo evit pal meur Tangi ar Menn : an troer.

M.L.

Adalek miz Meurzh 2006 : <http://www.geriadur.com>.

## Nedeleg laouen e Ti-gar Lannuon



**C** hañs o deus bet beajourien ti-gar Lannuon d'an 23 a viz Kerzu. Gwelet o deus an Tad Nedeleg eno ! Deuet eo gant ur prof dispar. A-raok e zispakañ en deus lennet dirak an holl al lizhiri bet kaset dezhañ, kaset gant reoù vras ha reoù vihan. Panelloù divyezhek en SNCF a veze goulennet ganto. Paotr e varv genn en deus roet neuze d'ur c'hontrolleur na oa


ket ofisiel) ur banell nevez, panell vrezhonek kentañ ar savadur : "Ti-gar Lannuon" skrivet warnañ. "Brav e vefe gwelet ha klevet brezhoneg en tier-gar memes tra !" en defe disklêriet an Tad Nedeleg en ur vont kull gant e stlenneg, ken seder ha tra. Sed o deus roet tud Aïta da c'houzout.

Evit gouzout hiroc'h : <http://aita.free.fr>.

### www.breman.org

#### Liorzhañ gant Bremañ !

Ha gouzout a rit e vez embannet bep miz ur pennad diwar-benn al liorzhañ war lec'hienn Bremañ ? Kit da welet war [www.breman.org](http://www.breman.org). Bep miz e kinnig Yannig Madeg alioù fur evit ober war-dro ho liorzhañ ha gouini frouezh ha legum. Klotañ a ra bewech gant tenz amzer ar mizvezh. Diwar-benn artichoad e vo kaoz e miz C'hwevrer...



#### Daou vloaz eo Bremañ !

**2 000 lenner bep miz**  
Er miz-mañ e vo daou vloaz Bremañ, kazetenn sishuniek hollvrezhonek war ar Genrouedad. E 2005 e oa aet an traoù war-raok evit ar gelaouennig enlinenn : skeudennoù zo bet ouzhpennet, ha tremen 2 000 lenner zo bep miz gant al lec'hienn. Kemennadennou kalonekaüs zo bet kaset da skapth Bremañ, alies-mat gant brezhoneg en eus an estren-vo pe Bretoned divroet. Digoust eo ha penna-dou brez nevez a c'heller lenn bep sishun, diwar-benn ar sinema, ar sonerezh, an endro...  
Bep Lun tro-dro kreisteiz adkavit Bremañ war <http://bremaik.free.fr>.

## Breizh kartennet war ar Gwiad

**DOUARONIEZH BREIZH**  
Pennañlec'h douaroniezh, kartennnoù ha statidonoù Breizh

**HOUC'HOUDIEZH**  
Douaroniezh | Sishunioù | Breizh | Breizh.com

**Klask**  
- Eep pe IPT OK  
- bro  
- departamant  
- kumun  
- Douaroniezh  
- Kartennnoù Breizh  
- Sishunioù Breizh  
- Ar Beiz e brezhoneg

**DOUARONIEZH BREIZH** war [www.gesbreizh.com](http://www.gesbreizh.com)  
Pennañlec'h douaroniezh. Kartennnoù ha statidonoù Breizh  
E Breizh ez avus 5 departamant. 8 bro istorel, 1 500 kêr ha kumun, hag ivez 26 bro (Luzern Vornav) ha 142 kumunadenn-kumunioù. Dagañ Breizh ha lakaat, ur voj gant un iderentelz klev. Ur gumunadenn a-unan ha lizegezhioù kengred digor war ar bed.  
Vat ar lec'hioù-mañ emañ renk 1 500 kêr ha kumun Breizh gant kaliteer resis. Gant kartennnoù e ho dizegezh hag e gellid e c'heller anaoudezh pennañlec'h douaroniezh Breizh. Dagañ a raer kartenn statidonoù war ar holl Breizh ha lizegezhioù douaroniezh. Istorioù, koaderezh, menezioù Breizh, ar Gwenn ha Dou, arvent dizegezh ha Breizh... Breizh Breizh ha Breizh e Breizh a zo ivez.

**H** ag anavezout a rit al lec'hienn Geobreizh.com? Savet eo bet e fin 2005 gant Mikael Bodlore-Penlaez ha Divi Kervella. Ur benveg evit kinnig perzhioù Breizh war dachenn an douaroniezh eo. Peder lodenn zo d'al lec'hienn : un diaz titouroù war kêrioù Breizh (1 500 kumun Breizh a gaver ennañ), ur rummad kartennnoù (broioù hengounel Breizh, koulz hag ar broioù melestradurel da skouer), statidonoù (tud, inizi, stêrioù...), gerioù vrezhonek an douaroniezh. Kartennnoù zo a vez kinniget digoust evit o implij war ar Genrouedad, gant ma vo meneget ar

gouerien. Tu zo da gavout ivez ur c'hinnig eus bannieloù Breizh.

Ul labour a-youl vat penna-da-benn zo bet graet gant an daou aozer. Divi Kervella a gas an enklaskoù da benn hag a ra war-dro ar brezhoneg. Mikael Bodlore-Penlaez a ra war-dro ar c'hartennnoù ha diorren al lec'hienn. Evitañ ez eus dreist-holl un dra a ra diouer d'hor yezh war ar Genrouedad : peadra da zidiñ ar vugale. "Int-i eo a ra gant ar Genrouedad da vat !" emezhañ.

Evit gouzout hiroc'h : [www.geobreizh.com](http://www.geobreizh.com).

**Bremañ** Keleier sishuniek e brezhoneg

**Liv an amzer**

**Bremañ?** Endro

23 a viz Meurzh 2006

Dagañ Bremañ keleier sishuniek Breizh ha Breizh

**Bremañ 202** - miz C'hwevrer 2006

Sinañ Karta Ya d'ar brezhoneg : div gumun nevez



KARTA SINET ER SENT

D'an 12 a viz Genver en deus sinet Yves Le Goff, maer ar Sent, ar Garta Ya d'ar brezhoneg... Displeget en deus ar c'huzulier-kêr Andre Raoul, e brezhoneg mar plij, dibabou e gumun e-keñver oberou evit hor yezh.

Ur pemzek ober bennak, e-touez an 28 kinniget gant an Ofis, zo bet dibabet gant ar Sent. Lakaet e vint e pleustr en daou pe dri bloaz da zont, a-benn tapout "live 2" ar Garta. Panelloù divyezhek, pennaou brezhonek e kelaouenn ar gumun, bruderezh evit ar c'hentelioù brezhonek d'an dud deuet a vo graet gant Ti-kêr ar Sent da skouer.


Pedit e oa bet ar c'hannad Jacques Le Nay, maer Ploue, d'al lid sinañ. Disklêriet en defe e oa prest Ploue da gontañ perzh e "Ya d'ar brezhoneg."



SINET E SANT-PABU IVEZ

D'ar Gwener 14 a viz Genver eo e oa bet sinet ar Garta (live 1), e Sant-Pabu, gant maerz ar gumun, Anne-Marie Laot. War un ton bras e oa bet graet, asambles gant hetou bloavezh mat ar c'huzul-kêr, dirak un 50 bennak a zifenniñ, pennaou kevredigezhioù ha servijoù ti-kêr. Un degemer a-feson a oa bet graet da Ofis ar Brezhoneg.

Panellou divyezhek er Mor-Bihan : kelaouiñ



Aozet e oa bet un emvod kelaouiñ e Ruvenieg d'an 21 a viz Kerzu 2005 gant Bemdez, Unvaniezh Demokratel Breizh ha Brezhoneg War-Raok. Aboae un toullad sizhunvezhoù e klask ur strollad tud ober reuz a-enep ar panellou divyezhek hag a vez staliet tamm-ha-tamm er Mor-Bihan, gant servijoù un departamant. Divizet e oa bet gant kuzulierien-departamant ar Mor-Bihan divyezhekaat ar panellou-hent goude an dilennadegoù. Ur gevredigezh zo bet savet a-enep ar panellou divyezhek hag aet e oa ur strollad tud da begañ skotch du war anvioù brezhonek ar panellou nevez-staliet. Dre ar skinwel, ar c'hazadig-se dispenn al labour graet war dachenn ar brezhoneg. Meneger eo bet meur a wech anv Françoise Morvan, brudet-tre evit al labour bet kaset da benn ganti da gas hor yezh war-raok, en arguzennoù implijet gant an enebourien d'an divyezhegezh war an hentou.

"Mall e oa dimp degas arguzennoù kontrol d'an dud a c'hallfe degemer kement-se evel gwinonez dre forzh o lenn hag o c'hlevet" eme Vertrand Deleone, eus ar gevredigezh Bemdez. Dedennus eo gwellet e oa bet degemeret mat UDB, Bemdez ha Brezhoneg War-Raok gant maer Ruvenieg, ur miz war-lerc'h e vefe kroget ar reuz. "Maer Ruvenieg a zo bet hegarat-kenañ" eme Vertrand Deleone. "Anzavet en deus bezañ lavaret forzh petra dirak ar c'hameratioù ken m'en deus kuitaet ar gevredigezh a-enep ar panellou divyezhek. Toulllet eo bet evel maered all o deus graet kement all" emezañ. Skrivet o doa an enebourien d'ar panellou divyezhek d'ur 130 ti-kêr bennak eus ar Mor-Bihan. Un dek bennak hepken a oa aet a-du ganto. Met gant skouer Ruvenieg e weler mat pa vez kelaouet an dud war an dachenn, en ur mod all, e c'heller cheñch penn d'ar vazh.

M.L.

Deskadurezh

Raktresoù klasoù divyezhek

E meur a gom eus Breizh ez eus raktresoù evit digeriñ klasoù divyezhek brezhoneg-gallec er skolioù publik a-benn miz Gwengolo 2006. En Aodou-an-Arvor ez eus anv da zigeriñ ur c'hlas e Ploufragan hag unan all e Gwengamp (skol La Chesnaye). E Penn-ar-Bed e klasker adreiñ lañs da raktres klas divyezhek

Daoulaz, a oa bet c'hwitet e 2005. E Milizag hag e Kemper (skol Kergomar) emeur o klask lakaat digeriñ pep a glas ivez. Hizv an deiz eo re abred c'hoazh da c'houzout ha dont e raio an holl raktresou da vat : ret e vo kavout bugale a-walc'h ha kaout asant an holl gostezennou, skoli-kêr, Enselerezh akademiezh...

UGB : ur burev nevez, ur prezidant nevez !



Ul lodenn eus burev nevez Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg (le-gleiz da zehou) : Alan Tudoret, Visant Dubois, Nelly Chaffrin, Silvi Toupin, Fanch Barvek, Jean-Michel Branelleg, Armelie ar C'hozh, Gwennie Larvol, Jean-Du Robin ha Stefan Alliot.

Jean-Michel Branelleg eo prezidant nevez UGB. Armelie ar C'hozh, hag a zo bet prezidantez e-pad pemp bloaz, a chomo besprezidantez evit ar bloavezh da zont. Izili all ar burev zo : Silvi Toupin, sekretourez, Alan Tudoret, eil sekretourez, Stefan Alliot, teñzor ar Visant Dubois,

eil teñzor. Ur c'huzul-merañ nevez zo ivez. Pevarzek ezel zo ennañ. Tu vo da gavout anv ha karg pep hini war lec'hienn Internet Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg.

Evit gouzout hiroc'h : www.ugbrezhoneg.com.

Diaspora

Emglev etre daou aozadur

E penn-kentañ miz Genver o deus roet Bretons du Monde ha Global Bretagne da c'houzout o doa savet un emglev kenlabour. Div gevredigezh int, Bretons du Monde o vezañ kevre koshañ ar Vretoned staliet en estrenvro. Global Bretagne a oa bet ganet e miz Eost warlene. Pal ar gevredigezh zo bodañ Breizh hag an holl dud tom-mouzh hor bro, hag a c'hellfe, dre o c'hargoù, diorren armerzh ha brud Breizh. Termenit a ra an emglev tachenn labour Bretons du Monde evel ar sevenadur, an identelezh, ha goulennoù a bouez evel unvaniezh velestradurel Breizh. Global Bretagne a bleto gant an ekonomiezh dreist-holl. Unan eus ar palioù zo sevel ur rouedad 500 den evit magañ ur preder war plas Breizh en armerzh etrebroadel. Un emgav a vo aozet d'ar 6 a viz Ebrel 2006 gant Association des Cadres Bretons, Bretagne International, un aozadur arc'hantaouet gant Kuzul-Rannvro Breizh a gemero perzh en emgav ivez. Evit gouzout hiroc'h : www.bretonsdumonde.org ha www.global-bretagne.com.

Skol Vreizh

An embannadurioù lakaet diaes

Kudennou arc'hant zo gant embannadurioù Skol Vreizh, e Montroulez. Bac'h zo warno, ken o deus ranket dic'hoprañ daou eus ar pevar implijad. Fall eo bet ar gwerzhioù er bloavezh 2005. Kalz disteroch int bet eget e 2004, abalamour ma n'eus ket bet graet berzh gant levrioù zo, evel Les cultures en Bretagne. Tregont vloaz zo e oa bet savet embannadurioù Skol Vreizh, pa oant bet distaget diouzh ar gwerdigezh Ar Falz. Strivoù a vo graet ganto er mizioù a zeu evit embann levrioù na vo ket re strizh o zachenn, ha fizians zo gant renerien Skol Vreizh e teunt a-benn da adsevel o stal.

Evit gouzout hiroc'h : www.skolvreizh.com.

Parti Breton

Dilez e brezidant

D'ar 14 a viz Genver e oa bodet e Sant-Nazer Kuzul Broadel Parti Breton. Jakez-Arnol Stephan en deus dilezet e garg a brezidant. Anvet eo bet Gerard Ollivier, prezidant ar C'huzul Broadel, en e blas da c'hortoz.

Sevenadur Breizh kinniget da saoznegerien Kreiz-Breizh

Ur rummad kendivizoù a vo kinniget er bloaz-mañ gant Skol-Uhel ar Vro hag ar gevredigezh Integration Kreiz Breizh e Gwarg. Hervez Marilyn ar Mogn, prezidantez Association Integration Kreiz Breizh, e vefe war-dro 5 % eus poblañs Aodou-an-Arvor a-om eus ur vro saozneger. "E Kreiz Breizh e teu rummadoù tud da chom n'int ket pivrik-tre, en Arvor eo disheñvel an traoù" emezi. "An dud-se a vez predriet er bloavezhioù kentañ gant kempenn an ti, kavout ul labour hag en em ziluziñ gant ar velestradurezh c'hall" emezi. Nebeut a amzer evit ober anaoudegezh gant sevenadur ar vro. "Met ul lodenn eus ar saoznegerien-se, staliet abaoe ur pennad ha gouziek, a glask gouzout un tamm hiroc'h war ar pezh a ra pezhioù dibar Breizh."

Gant skoazell Skol-Uhel ar Vro ez eus bet dibabet temoù ha tud barek war an danvezioù kinniget. Tud prest da gomz saozneg war danvezioù arbennik ivez : "Ma ra berzh ar rummad preze-gennoc'h-se e klaskimp kinnig reoù all e Breizh, lec'h ma 'z eus kalz a saoznegerien o chom" eme Bernez Jestin, rener Skol-Uhel ar Vro. Pemp prezegenn a vo, en holl, e Gwarg. En hini gentañ zo bet aozet d'ar Merc'hêr 18 a viz Genver, diwar-benn an Endro, gant Jean Covaër. An eil a vo d'ar 15 a viz C'hwevrer, gant Herve Abalañ, diwar-benn anvioù tud hag anvioù lec'h Breizh. Francis Favereau a ginnigo lennegezh Breizh d'ar saoznegerien d'ar 26 a viz Meurzh. Henonniezh Breizh a vo displeget gant Michael Batt d'ar 4 a viz Here. Distreiñ a raio Jean Covaër da Wareg d'ar 15 a viz Du evit kinnig Breizh hag ar mor. 25 euro evit kinnig perzh er pemp prezegenn. 10 euro evit un abaden. Evit gouzout hiroc'h : 02 96 24 87 90 pe akib@wanadoo.fr.



# Un nozvezh gant ar Samu sokial



**Bep noz e labour izili ar Groaz Ruz dre straedoù Roazhon ha kêrioù all ar vro d'ober war-dro tud ar straedoù.**

**Ne 'z eus nemet tud a-youl vat, a ra tro kêr da reiñ ur banne soubenn, kafe, frouezh, bara, pe ur pallenn, ha dreist-holl da eskemm un nebeud komzoù gant tud a dremener alies dirazo hep o gwelet ken. Labourat a ra ar Samu sokial gant servij ar 115, a ginnig un nebeud plasoù e oaledoù "degemer-mallus".**

**Roll un nozvezh boas.**

7.30

Iv e ti ar Groaz Ruz. Emañ ar soubenn an tan dija, hag ar c'hafe o tommañ. Ar blienier, penn ar skipailh, hag ar pevar ezel a-youl vat a wisk chupennoù gell ha ruz ar gevredigezh.

Loc'hañ a ra un nebeud re davet ti ur bararaer a ro bep noz ar pezh n'en deus ket gwerzhet d'ar samu sokial.

8.00

Distro straed Dupont des Loges. Debrñ a ra ar skipailh asambles, pellgomzadennoù kentañ ar 115 a vez resevet. An dud er straed a rank pellgomz d'an niverenn-mañ a-benn goulnenn ul lojamant evit an nozvezh, pe evit ma tremenfe ar Samu hepken, da gaout ur banne traoù tomm pe ur pallenn. Pep hini a c'hell pellgomz ivez, pa gav dezhañ emañ unan bennak en arvar er straed.

8.30

Arsav kentañ ar c'harr-samm, plasenn ar Republik. Un dek bennak a dud dilajeiz a dosta, paotred yaouank dreist-holl, etre 20 ha 25 bloaz, gant o chas evel-just. Ur banne soubenn, ur werennad kafe, hag un nebeud komzoù a vez eskemmet. Ar re o deus c'hoant komz a ra: fall eo bet an devezh evit ar gant, met n'eo ket bet re yen an amzer.

F. en deus respontet d'un enklask diwar ar "chewing-gum". Pa ne chom nemet un nebeud dent dezhañ en deus c'hoarzhed brav pa 'z eo bet goulnennet digantañ ha plijout a rae dezhañ kaout anezho propr ha ya c'h... Sonj en deus F. eus ar c'houlz ma kemere kentelioù brezhoneg gant Pêr Denez er Skol-Veur. Festoù-noz e gorn-bro "kostez Gwengamp a bije dezhañ. Bremañ n'en devez ket tro ken da gomz ar yezh, nemet fenoz e vo eskemmet un nebeud gerioù!

9.30

Kaset e vez an Aotrou F., eus bro Senegal, da oaled Moigné, e-tal Reuz. C'hwitet eo bet gantañ ar c'harr-boutin a gas enno bep noz an dud o deus goulnennet bod gant ar 115. Tri oaled a seurt-se a zo e Roazhon, evit an "degemer-mallus". Teir nozvezh a zo tu chom, a-raok mont d'ar straed en-dro pa n'eus diskoulm all ebet.

10.00

Ur bellgomzadenn gant ar 115 : goulnennet e vez tremen e kreizenn kenwerzh Colombia. Ur paotr yaouank a gaver eno, zo vloaz d'ar muiañ tout. Laouen eo gant ur banne soubenn : n'en deus debret netra abaoe an derc'hent mintin. Re ziw-zhat en deus pellgomzet d'ar 115, ne 'z eus plas ebet evitañ. Ur pallenn a vo roet dezhañ, da gousket e trespasioù ar stal-vras.



Yen-hi e teu da vezañ an amzer er c'houlz-mañ-bloaz. Kriz e c'hell bezañ an noz evit an dud divod.

11.00

Tremen a ra ar Samu sokial war blasenn ar C'houldri. Drammet, morgousket an dud, astennet dindan skaliéroù, en avel sklas a zo savet a-benn bremañ. Loeroù a vez goulnennet gant ur paotr yaouank : warc'hoazh e c'hell tremen dre wiskva ar Groaz Ruz.

12.00

Arsav diwezhañ en ti-gar. Un toullad tud a zo c'hoazh, laouen da gaout ur banne tomm ha da gomz ur pennadig. Chas a zo c'hoazh ganto : kalz n'eont ket d'an oaled enno. O mignon pemdeziek eo ha pouezus bras evito. Disfiz a vez gant tud ar straedoù pa vez profet boued gant an dud evit ar chas : c'hoarvezet eo e vefe boued ampoezonet. Klaviñ eo Tilt ar c'hi bihan. Drammoù en deus bet digant ur

mezeg-loened kevratet gant an ti-kêr evit ober war-dro chas tud ar straedoù evit ur priz dereat.

A. a zo dilabour er mare-mañ. Enskrivet eo e Interim, met ne vez kinniget netra dezhañ evit bremañ. Neuze e kont deomp en deus evet un nebeud banneoù re fenoz.

Taer ar vuhez er straedoù : laeret ar pallennoù, buan e teu cheu etre an dud pa vezont drammet pe mezv, ha feuls evit neuze. Met skoet e vezer gant ar c'hengred a zo ivez : ur mignon a zo tont, ret eo gortoz, ur pallenn a fell dezhañ. Abaoe zo vloaz e vez E. gant ar sida, met gant tud ar straedoù ne vez ket lakaet a-gostez na gwelet fall.

Doujañs evit izili ar Groaz Ruz a zo ivez. Degemerus ha seven tud ar straedoù gant ar re a daol ur sell outo hag a dremen un tammig amzer ganto.

00.15

Distro d'ar Groaz-ruz, dre straedoù kêr kousket-c'hwec. Sioul eo bet an nozvezh...

Maiwenn Raymaudon



Pallennoù pe loeroù tomm a vez roet ingal gant tud a-youl vat ar Groaz Ruz d'ar re a vez er straedoù.



# Trec'h Evo Morales

Aet eo Evo Morales da brezidant ar republik e Bolivia dre zastum 54 % eus ar mouezhioù. Evit ar wech kentañ en istor ar riez-se ez eo bet gounezet ar garg politikel uhelañ gant un Henvroad. Roet en deus da c'houzout ar gwir Aymara a zo anezhañ e rafe e vicher en ur zoujañ da lezennoù pennañ skiant bevañ kenelioù koshañ ar menezzeier  
**Andez : Arabat bezañ laer (en aymaraeg *ama sua*), arabat bezañ lezirek (*ama quella*), arabat bezañ gaouiad (*ama llulla*). Ouzhpennet ez eus bet gantañ ur pevare lezenn : Arabat bezañ sujet (*ama llunky*).**

N'eo ket ar wech kentañ ez a ar galloud gant un Henvroad en riez eus Amerika Latin. Ur prezidant amerikan a oa ivez eus Amerika. Evit Garcia (1806-1872) bet lakaet da brezidant ar republik e Mec'hiko e 1861 hag a zastumas brud o talli ouzh ar c'halloud bet kaset da aloubiñ e vro gant Napoleon III. Feukus eo ne vefe ket c'hoarvezet un hevelep darvoud e Bolivia abretoc'h, ar vro a ya an Henvroidi hag an Hironed d'ober ouzhpenn an tri c'hard eus ar boblañs enni.

Bro baourañ Amerika ar Su eo Bolivia. Pinvidik eo ar c'hondon anezhi koulskoude. Emañ eno eil pourvez gaz ar c'hevandir. Biskoazh n'eo deus getlet Henvroidi Bolivia tennañ o mad eus kenwerzh an danvezioù diaoz dastumet en o bro abaoe mare trevadennerezh ar menezzeier Andez gant ar Spagnolek. Aet e oa an douaroù strujusañ gant an estrenien. Rediet e voe an Henvroidi da gñañ evit an olivierien wenna. Pounner e voe ivez an tallhoù lakaet warno

endra ma kreske peadra mistri ar vro oc'h ezporzhiañ arc'hant ha staen mengleuzioù frouezhus-kenañ Potosi. Stourm an drevadennerien e voe an hini a roas he frankiz da Volivia. Ne voe ket hini an Henvroidi ha chomet eo ar re-se e renk izelañ ar gevredigezh betek an deiz ar hiziv. Da heul un emglev etre pennoù ar riez hag ar c'hompagnunezhioù liesvro diwar-benn implij ar gaz eo en em savet an Henvroidi, nevez zo, evit reiñ da gompren ne asantent mui da lezel etrenien d'ober berzh en o bro diwar o c'houst. Trec'h Evo Morales a laka anat int aet skuizh o sujañ da lezennoù ar re all.

## BODAN MOUEZHIOÙ AR VENGLUEZIERIEN HA RE AL LABOURIERIEN-DOUAR

Displeget a oa bet er pennad embannet e niv. 285-286 *Bremañ* (An Henvroidi war hent ar galloud) petra e oa bet ar stourm aozet gant Evo Morales hag e strollad politikel, ar M.A.S. (Luskad Trema ar Sokia-

louriezh). Ganet eo prezidant nevez Bolivia e 1959 en ur vourc'hadenn annezet gant mengleuzierien eus uheldirioù ar vro. Berr e oa ar gwenneien gant e dud ha lakaat a reas termen d'e studi abred. Gounidig e teus da vezañ pelloc'h en takad trovanel a zo eus Chapare, e-kreiz ar vro. Feuket gant al lezennoù noazus divizet e-keñver ar broduerien koka gant pennoù ar riez diwar intrudu ar Stadoù-Unanet war zigarez stourm a-enep an trafikerezh drammm, en em lakaas da zifenn taer gwirioù e re. Ne voe ket pell oc'h erruout e penn sindikad ar broduerien koka, hag evit astenn ar stourm war an dachenn bolitikel e savas un aozadur da gemerout perzh en dilennadegoù, ar M.A.S. Komprenet en deus e ranke bodañ mouezhioù ar vengleuzierien ha re ar c'hounedeien evit gounid ar galloud. Betek-henn e lakae an tu-kleiz ar vicherourien da enebiñ ouzh al labourien-douar petra bennak ne oa nemet Henvroidi en daou rummad sokial.

# Ur brezidantez evit Chile



Evit ar pevare gwech emañ ar gostezenn gleiz e penn ar vro abaoe fin renad Augusto Pinochet. Tad Michelle Bachelet a oa ur stourmer sokialour, lazhet dindan diktatouriezh Pinochet.

## UN DEN DISTUDI, MET FIN AVAT

N'eo ket sur e teuo bray gant Evo Morales e penn ar riez. Un den distudi e chom. Unan fall eo da lenn ha gwashoc'h c'hoazh da skrivañ. Estreget skiant prenet war dachenn ar stourm a vo ezhomm evit seveniñ e vicher nevez. Fin eo koulskoude hervez e genstourmerien dostañ. Barrek eo evit santout diouzh an dud, diouzh an traoù. Reiñ a ra lod da c'houzout ne c'houzañv ket ar rebechoù en e vod talli outi, n'eo ket evit al labourioù graet a-stroll ha ne oar ket skoulmañ emglevioù padus.

## UN HENVROAD E PENN BOLIVIA

Anat eo e vez lakaet diaes ar c'hompagnunezhioù liesvro gant trec'h Evo Morales, dreist-holl re ar Stadoù-Unanet, ken taer eo bet prezegemmoù ar prezidant nevez en o c'hevicher. Roet en deus da c'houzout, kerken ha dilennet, e vo lakaet kemmoù en emglevioù graet etre ar re-se hag ar riez evit dastum gaz e Bolivia. Ne asanto ket da gendalc'h ar prezezh gouzañvet keit-all gant e genvroidi. Ne vo ket mui e vro un takad digor frank da rolennoù didruez ar frankizouriezh diharz. Aet eo koulskoude eus an eil bro d'eben en Europa evit embann ne vo diberc'hennadur ebet hag e toujo d'al lezennoù war an dachenn ekonomikel. Re vras e chom an ezhommoù danvezioù gremm, forzh penaos, evit nac'hañ en em glevet gant penn nevez Bolivia.

PaM

## WAR ROUDOÙ RICARDO LARGOS

Ricardo Lagos, a oa prezidant betek-henn, a lezo ar plas gant Michelle Bachelet d'an 11 a viz Meurzh. Disklêriet he deus Michelle Bachelet e savo ur gouarnamant ennañ kement a baotred hag a verc'hed. Merañ al levedoù ha gwellaat an deskadurezh a zo bet lakaet en a-raok gant e-kerzh he c'houzad brudañ a-raok ar votadeg.

Diwar ar pezh a c'heller klevet er c'hevicher etrebroadel, e vefe Michelle Bachelet tostoc'h e-keñver mennozhioù eus prezidant Brazil, Lula da Silva, eget d'ar prezidant nevez dilennet e Bolivia, Evo Morales, pe da brezidant Venezuela, Hugo Chavez.

## DILENNADEGOÙ DA ZONT E SUAMERIKA

E Suamerika eo renet Arc'hentina, Bolivia, Brazil, Chile, Uruguay ha Venezuela gant gouarnamantoù eus ar gostezenn gleiz. E 2006 e vo dilennadegoù evit ar prezidant e Brazil, Costa Rica, Colombia, Ecuador, Mec'hiko, Nicaragua, Perou ha Venezuela.

# Tapout ar wagenn

D'ar 14 a viz Genver e oa bet dalc'het un diviz diwar-benn plas ar c'hrouin er mediaoù brezhonek hiziv an deiz. Anv zo bet eus ar skinwel, ar c'hazetennoù, ar genrouedad hag eus ar skingomzioù. Un digarez evit skipailh Radio Kerne da embann e oa o vont da c'houlenn frekañsoù nevez digant ar CSA, evel ma raio ar skingomziù all, o skignañ e brezhoneg pe get.



Lou, Gael ha Laetitia, eus skipailh Radio Kerne.

**e**miz Mae e ranko bezañ kaset teuliadoù ar skingomziù a fell dezho kaout ur plas ouzhpenn war ar vandenn FM. Ar CSA an hini eo a ren war an traoù-se hag ar wech-se emañ e vo dezhañ rannañ frekañsoù ar skingomziù. Da c'houde e vo nivelezhioù skignañ skingomziù ha disheñvel dezho ar jeu.

## SKOUER RADIO KERNE

Abalamour da-se eo a-bouez-bras evit ar radioloù brezhonek evel Radio Kerne, met ivez Arvorig FM, ha sur a-walc'h Radio Kreiz Breizh ha Radio Bro Gwened, dont a-benn da gaout frekañsoù nevez. Evit ar poent ez eus ur frekañsenn pe ziv gant ar skingomziù hollbrezhonek pe divyezhek ha n'eo ket a-walc'h. Kemeromp skouer Radio Kerne.

Kroget en doa gant ur frekañsenn hepken, ar 90.2, e 1998. Staliat e oa bet ar skingaser e Ploneiz, war toenn ar c'hastell-dour. Ar skignañ a oa evedus a-walc'h en hanternoz hag e reter Kemper met ned ae ket gwall bell. Dibaoe ez eus bet asantet reiñ un eil frekañsenn da Radio Kerne, an 92, skignet eus Poullan ar wech-mañ.

An dra-mañ en deus roet tro d'ar radio da skignañ gwelloc'h hec'h abadennoù e kornog Kemper, betek Kast ha Bro ar C'hap.

## KLEVET A-BOAN E LEC'HIOÙ ZO

Gallout a rafec'h soñjal eo brav ar vuhez e-giz-se met n'eo ket tre. Diaes e vez selaou Radio Kerne e Kemper, padal emañ Ploneiz seizh kilometr a-lec'h. Memes tra e Konk-Kerne. N'eo ket galloudus a-walc'h skingaserien ar radioloù kevredigezhel evit tizhout kêrioù evel-se. E Bro Gwened ha Bro Kemperle eo gwashoc'h c'hoazh. Ne vez ket klevet Radio Kerne daoust ma vez ar skipailh kazetennerien o vont ingal war an dachenn da sevel reportajoù el lec'hioù-se, ha daoust ma vez brezhonegerien ar c'hornioù-bromañ o c'houlenn klevet Radio Kerne. Abalamour da-se e c'houlennno burev Radio Kerne kaout ur frekañsenn e Kemperle, marteze unan e Kastellin.

## ARVORIG FM E BREST

Eus he zu e klasko Arvorig FM kaout ur frekañsenn e Brest, lec'h ma vez diaes-tre

klevet anezhañ evit ar poent. Ar radioloù kevredigezhel a ranko kinnig teuliadoù klok ha sirius ken-ken rak e-tal dezho e vo radioloù all o c'houlenn an hevelep frekañsennnoù, radioloù hollc'hallek, kenwerzhel pe damgenwerzhel hag o deus ur rouedad ha kontoù asur. E Kemperle en deus Yann-Ber Thomin embannet e oa prest ar C'huzul-rannvro da harpañ goulennnoù ar skingomziù hollbrezhonek pe divyezhek. Anv zo bet graet ivez eus ur rouedad radioloù brezhonek a vefe klevet war Breizh a-bezh, pe c'hoazh eus ur bank abadennoù brezhonek a c'helle bezañ skignet gant ar radioloù a felle dezho, pe c'hoazh eus ur gwir radio publik e brezhoneg. Met an traoù-se a chom danvez emvoudoù evit ar poent.

I.E.

1. CSA - Conseil Supérieur de l'Audiovisuel.
2. Niv eurvezh a abadennoù brezhonek a vez skignet bennec'h gant Radio Kerne e-pad ar sizhun, un tammig nebeutoc'h e-pad an dibenn-sizhun. Pep tra na vez ket produet gant Radio Kerne e-unan. Lod eus an abadennoù a vez klevet war e wagennnoù zo eskemmoù a vez graet gant Arvorig FM, Radio Kreiz Breizh ha Radio Bro Gwened.

# Prizioù 2005



Gant ur c'hizeller yaouank eus Sant-Pêr-Pouald, Marc Le Guen, e oa bet savet ar Priz er bloaz-mañ. Roet e obet da (a-glez da zehou : Varanna Donnart, Güngner an Henarff (evit Kanerion Pleuigner), Herve ar Beg, Ifig Troadeg, Ronan Hirren, Goulwena an Henaff ha Gwenael Dage (evit skipailh Ya3).

**D'ar Sul 22 a viz Genver e oa bet skignet war Breizh a-bezh' abadennoù vrezhonek France 3 Ouest, Red an Amzer, evit lidañ ar "Prizioù". Abaoe nav bloaz zo bremañ e vod Fañch Broudig ur juri brezhonegerien bep bloaz evit priziañ labour hemañ-henn, war dachenn ar brezhoneg.**

**W**ar bourzh al lestr *Bretagne*, e porzh Sant-Maloù, e oa bet filmet al lid. Ur juri seizh den a oa bet bodet gant Fañch Broudig, rener abadennoù brezhonek France 3 Ouest. En o zouez kelennerien, sonerien, izili kevredigezhioù sevenadurel. C'hwec'h priz zo bet roet, mui ur seizhvet hini, "Priz ar juri." Aet eo neuze ar maout gant...

**Herve ar Beg**, evit ar gwellañ abadennoù radio (diwar-benn tud bet e Mururoa, evit Arvorig FM).

**Marianna Donnart** ha **Moran Dipode**, evit ar gwellañ levr evit ar re yaouank, gant *Brezel an Evezent* (embannet gant Keit Vimp Bev).

**Ronan Hirren**, evit ar gwellañ film, gant *Brezhoneg e 6 miz* (produet gant Kalanna).

**Ifig Troadeg**, evit ar gwellañ levr gant *Gwerzioù ha sonioù Bro-Dreger* (embannet gant Dastum Bro-Dreger).

**Kanerion Pleuigner**, evit ar gwellañ pladenn, *Cantiques et Chants profanes*.

**Yann-Fañch Jacq** ha skipailh *Ya!*, evit Priz brezhoneger ar bloaz, gant krouidigezh ar sizhunieg hollbrezhonek war baper *Ya!*.

Priz ar juri zo aet gant **Goulwena an Henaff** ha **Riwal Kermareg** evit an abadennoù vrezhonek evit ar vugale, *Mouchig-dall*, skignet bep Merc'her beure war ul lodenn eus Breizh.

\* Perak ober se evit abadennoù ar Prizioù hepken ?

## Naoned

### Deomp dezhi ! war Alternantes

Abaoe an 11 a viz Genver e c'hell brezhonegerien yaouank Naoned selaou un abadennoù graet evito gant skipailh Radio Kerne, gant sikour Arvorig FM a-wechou. Bep Merc'her e vo skignet da 11 eur betek 11e30 eur, hag adskignet e vo d'ar Sul da 1e30 g.k. Radioloù all a c'hell mont e darempred gant Radio Kerne ma fell dezho skignañ an abadennoù-se.

## Sinema

### Gouel ar Filmoù hag ar Pellwel er Broioù Keltiek

En Aberfal (Falmouth) e vo aozet Gouel ar Filmoù Keltiek er bloaz-mañ, eus an 29 d'an 31 a viz Meurzh. An trede gwech e vo da Gerne-Veur degemer ar Gouel bloaziek-se ma vez roet prizioù d'ar filmoù gwellañ graet er broioù keltiek, peogwir e oa bet eno e 1997 hag e 2001. Dibabet eo bet ar filmoù a gemero perzh er gevezadeg. Eus Breizh ne vo

nemet daou film : *Le Poème de la Mer* (un dresadenn-vev) ha *Brezhoneg e 6 miz* (gant Ronan Hirren). En holl e vo 95 film o kevezh : 27 eus Bro-Skos, 26 eus Kembre, 30 eus Iwerzhon ha 10 eus Kerne-Veur.

Evit gouzout hiroc'h : <http://www.celticfilm.co.uk/>.

# Studi ar festoù-noz

Arabadosc'h danvez studi zo, ret eo anzav. Staget en deus Olivier Goré gant un dezenn douaroniezh diwar-benn... ar festoù-noz. Pelec'h ha pegoulz e tegouezhont, gant piv e vezont aozet, peseurt plas zo ganto er gevredigezh ? Sed aze ar pezh a felle d'an enklasker lakaat sklaer war baper, evit ar wech kentañ.



Kinnig a rae Olivier Goré e labour e-kerzh gouel Sevenadur ar Vro, aozet gant kalz Keltiek Roazhon, d'an 10 a viz C'hwevrer, da 8e30 noz, e Ti Karter Kéjaryn. Kasel e vo an diviz gant Glenn Jegou, armarour war Franco-Bleu Arving ha kenurzhier Skeudenn Bro-Roazhon.

## Penaos eo deuet deoc'h ar c'hoant da studiañ ar festoù-noz ?

Ne oa bet gwech ebet studiet ar fed sevenadurel-se gant savboent an douaroniezh. C'hoant am boa gwelet peseurt plas a c'helle kaout ar sonerezh hengounel en "riad anvet "Breizh". Ma vefe kavet diforc'hioù, klask gouzout perak. Soñjal a rae ma vefe mat ivez kaout sifroù a-vremañ er peñn ar gouelioù-se. Dindan renevez Jean Pihan em eus savet ma danvez-keñver, bet kinniget e 2004. Furchet en dielloù am eus graet da gentañ evit dastum sifroù diazez. Er c'helaouennoù on bet o klask deiziad, lec'h, aozerien ha sonerien holl festoù-noz 1990, 1995, 1999, 2001 ha 2002, war bemp departamant Breizh. Goulennataet em eus tud war ar plas, er festoù-noz, ivez.

## Petra zo deuet war wel ?

Ur c'hresk bras zo bet etre 1995 ha 1999. E 1990 e oa festoù-noz dreist-holl e Kreiz Breizh, war un dachennad etre Karaez, Rostrenn ha Pondi. An niver a festoù-noz aozet zo aet war stabilaat e 2001 ha 2002. Diforc'hioù splann zo deuet e-keñver lec'hiaer. Stank eo ar festoù-noz e Breizh-Izel, kalz-kalz muoc'h evit e Breizh-Uhel. Kalz stankoc'h eo ar festoù-noz ivez war an

arvor evit en douaroù. An diforc'h-se zo splannoc'h c'hoazh e Breizh Uhel lec'h ma kaver festoù-noz dreist-holl tro-dro d'ar c'hêrioù bras (Naoned, Roazhon, Sant-Maloù, Sant-Nazer). E Breizh-Izel ez eus un diforc'h etre an norzh hag ar su. Muoc'h a festoù-noz a vez aozet er c'hreisteiz (Gwened, an Oriant, Kemper). Perzh an arvor a c'hell bezañ displeget gant an niver a dud zo o chom war ribl ar mor, met ivez gant an touristerezh.

## Hag e-keñver an dud ?

Dedennus eo gwelet n'eo ket tud ar gumun ar brasañ niver o tont d'ur fest-noz. Bez' ez eus a-dra-sur, met ar brasañ niver zo o tont eus ar c'horn-bro a-bezh, ur 17 kilometrad bennak tro-dro sal ar fest-noz. Ur bal, da skouer, a zeddenno dreist-holl tud ar gumun, er c'hontrol. Petra a ro c'hoant d'an dud mont d'ur fest-noz ? Dañsal da gentañ penn ! Da eil e c'hell bezañ en abeg d'ur strollad, da drede eo brud ar fest-noz e-unan, ha goude-se peogwir e oa ar fest-noz tostañ.

## Traoù zo deuet war wel diouzh tu an aozerien ha sonerien ?

E-keñver an aozerien ez eus bet tu da welet e vez aozet tamm-pe-damm 50 % eus ar

festoù-noz gant kevredigezhioù tost ouzh Breizh hag e sevenadur. Da lavaret eo, kalc'hioù keltiek, bagadoù, kuzulioù-skoazell skolioù diwezhek ha me oar me. An 50 % all a c'hell bezañ aozet gant a bep seurt kevredigezhioù : strollad melldroad ar gumun, kuzul ar gouelioù, pe ar gumun hec'h-unan... Evit ar pezh a sellouzh ar strolladoù, bez' e kaver tri seurt. Lod zo strolladoù a son war Breizh a-bezh. N'int ket niverus. Etre 50 ha 60 fest-noz e c'hellont ober e-korf ur bloavezh. Da c'houde e kaver strolladoù a labour war tachennd un departamant. Lod na dreuzont gwech ebet harzoù o departamant ! Da drede e kaver strolladoù a ya da seniñ e festoù-noz o c'horn-bro hepken.

## Peseurt dielfennadurioù hoc'h eus graet ?

Merzout a reer adarre pegen pouezus eo an dachennad buhez a vez graet "bro" diouti, e Breizh. C'hoant am eus e sikourfe ma labour aozerien festoù-noz Breizh. Reiñ tro dezho da anavezout gwelloc'h o endro.

## Komzoù dastumet gant M.L.


Tu zo da lenn labour Olivier Goré e Levaoueg Skol-veur Roazhon 2, hag ivez war lec'hien ar CNRS : <http://tel.ccsd.cnrs.fr>.

# Afer an Amoco

Kazetenner e oa Yvon Rochard pa oa c'hoarvezet lanv du an Amoco Cadiz e 1978. Un enklask kazetenner en deus savet, 28 vloaz goude, diwar-benn ar peñse hag ar prosez e Chicago.



Yvon Rochard zo mestri-photosajener en IUT Lannuon. Kenlabourer a ra gant ar gelaouenn AïMen.



## Savet hoc'h eus ul levr anvet An Afer Amoco. Peseurt eñvorennoù personel eus ar mare hoc'h eus ?

O labourat evit Ouest-France e Brest e oan ha dihunet un delz bennak gant c'hwezh kreñv an esañs, evel tout an dud. Da greisteiz e oan war an tuniennoù gant ul luc'h-skuedenner. Gwelet am boa lanv du an Torrey Canyon e 1967 c'hoazh, met ne oa ket ken kreñv ma eñvoren. Soñjal am eus eus ar gounnar, eus manifestadegoù rust e Brest. D'ar mare-se e oa politikelat-kenañ ar re yaouank, ur skritellig "kleizour" war o fenn. O vlejaj e oant kement war Valéry Giscard d'Estaing, ar prezidant, ha war Alphonse Arzel, maer Gwitalmeze.

## Traoù zo hoc'h eus addizloet ?

An Torrey Canyon a oa bet ur gwallzarvoud bras e pennoù an dud. E 1978, e veze klasket war-lerc'h ar re giriek, da lâret eo ar Stad. Ar Stad n'he doa ket diwallet rak al lanv du, n'he doa rakwelet mann ebet. Ankouezet o deus an dilennidi e oant o vizañ ar Stad en deroù. An Amoco a zo deuet diwezhatoc'h. Tennaet o deus an dilennidi o c'hlemm a-enep ar Stad e 1983 nemetken !

## Petra a zo bet ispisial gant an Amoco ?

Al lanv du eo an dra bennañ en doa skolet ar speredoù. C'hoant gouelañ o doa an dud, moustret o c'halon. En ur vout'hañ an enklask evit al levr, em boa ar santi-mant e oa afer an Amoco un droiad dreist-

ordinal. Risklañ a raen neuze bezañ dipitet. Evel er sinema ! Ar c'hontrol a zo c'hoarvezet : Afer an Amoco a oa dreist-ordinaloc'h c'hoazh ! Ar c'hoant da gaout justis a oa nerzh brasañ an dilennidi. A-drugarez dezhi int aet dreist o arvarioù. Gouest int bet da dreiñ o c'hoannar en un nerzh da lakaat tu kleiz ha tu dehou a-stroll. Gwir eo e ro talvoudegezh ma levr da labour an dilennidi, met ma vije se ar politikezh pemdeziek, moaien em bije da zifachañ gantañ.

## Komzoù dastumet gant Stéphanie Stoll

L'Affaire Amoco, gant Yvon Rochard, embannet gant AïMen (24 euro an tamm).

## Un nebeud deiziadoù...

**16 a viz Meurzh 1978** : peñse an Amoco e Porsal, saotret gant 220 000 tonennad eoul-maen en aodou hanternoz ar vro.  
**7 a viz Meurzh 1980** : peñse an Tanio, saotret aodou Bro-Dreger.  
**28 a viz Mezheven 1980** : kroget gant ar Sindikad Amoco, ennañ 98 kumun ha daou zepartamant.

**28 a viz Mezheven 1984** : Lez-varn Chicago a lâr ez eo Amoco kiriek d'al lanv du.

**24 a viz Genver 1992** : Amoco a zle paeañ 225 milion a lunioù d'ar c'humiunioù.  
**12 a viz Kerzu 1999** : peñse an Enika, saotret an aodou atlantel gant 15 000 tonennad eoul-maen.

## Liger-Atlantel

**Miliadoù a evned kousiet gant tireoul Lavaret en deus an LPO (Ligue de Protection des Oiseaux, Kevre gwarezñ an evned) e oa bet mastaret etre 12 000 ha 15 000 labous gant eoul-maen en aber al Liger, e deroù miz Genver. Ha kement-se da-heul ur stokadenn etre daou lestr dirak Donez. War lec'hedegoù an daou ribl eus ar stêr ez eus bet gwelet miliadoù a evned kailharet gant tireoul, un 60 m' bennak a vije bet skuilhet gant an daou lestr da-heul ar stokadenn. Tremen 80 % eus laboused ar c'hornad a vije bet tizhet. Kalz a ouennoù eus broioù hanternoz Europa (gwazi, houidi, hirc'hasegoù bihan...) a dremen ar goañv en aber al Liger ha tro-dro (genouioù al Lenn-Yeur hag ar Briver, paludou Gwennan). Met ar spesad a seblant bezañ tizhet ar gwashañ eo an avoseted mistr, zo stank en takad : 1 % eus ar re a vev en Europa a vije bet tizhet gant ar skuilhadennoù tireoul. War aodou Mor-Bihan Gwened ez eus bet gwelet avoseted kousiet o flufu a oa o tont eus genoù al Liger. Ar marv eo a c'hortoz an darn vrasañ eus al laboused-se, pe peogwir o vint ampoezonet gant an tireoul en ur glask naetaat o flufu, pe gant ar riv, rak ken intret eo bet o flufuvann gant an danvez saotrus ma n'eo ket didreuz d'an dour ken. En devezhioù kentañ e oa bet klasket disteraat ar gwallzarvoud gant Prefeti Naoned, ar pezh an doa lakaet meur a strollad, ar Re C'hlas, Brezh-Vev-SEPNEB, LPO, da fuloniñ. Ur vanifestadeg a oa bet aozet gant Emgann dirak prefeti Naoned d'ar 14 a viz C'hwevrer.**

# Soubenn Molotov

**A ! Lipet en dize e vourrou, ar c'hamarad Viatcheslav Mikhaïlovitch Skriabine, alias Molotov, a pa vize bet doc'h taol genomp, d'ar Yaou 5 a viz Genver tremenet ! An deiz-se, evit ar wezh kentañ em buhez, em boa tañvaet ur soubenn Molotov.**



Ha tañvaet hoc'h eus soubenn Molotov c'hoazh ?

**t**roiù seizh eur nemet kard, d'un eur speredek enta, e oa erru ma mignon gwellañ er gêr. A-c'houde oc'h penn daou-ugent vlez ma am anavomp ne vez ket a ardou komp ; pa erruer d'an eur-se e chomer an tañvañ. Er gouiet a-walc'h a rae. Daet e oa an "vreizmatañ", da lâret eo da gas e tañvad mat deomp, el m'emañ deleet d'an sermen-se ag ar blez.

"Evit ur wezh," eme-eñ din, "n'eo ket gwin a zo daet genin."

Ur voutailhad a oa getañ en e zorn neozh, liv ar melen geti : ur poñch bennak marse, ur restad Kalanna ?

"Soubenn potiron !" eme-eñ, "soubenn vat graet genin an neizhour, ur voutou-zenn ar ar galon !"

"Ag ar choazh !" eme-me neuze, "e oan ec'h alaj ur geusteurinn kig-bevin, ha bout a zo evit c'hwec'h."

"C'hwec'h 'oamp neuze, Santez Mari, En-dro d'an doal ; C'hwec'h 'oamp neuze, Santez Mari, N'omp mui 'met tri..."

Ne ouïan ket penaos e rae Yann-Ber Kalloc'h fed a gement-se, met dalc'het em eus-me atav da gempenn boued evit c'hwec'h, na bout n'omp mui 'met tri. Ne vñ ket tapet berr el-se !

Setu lakaet ar soubenn ar an tan, ha ni kroget da ziviz, amzer d'ar vestrez erru ag he labour.

Un hantereur ar-lerc'h e oamp doc'h taol get koan. Div glogead soubenn da bep unan. Ha me da dañvaet brouluzenn ma c'hensort :

"Petra zo en ho soubenn 'ta ?"

"Petra ?" eme-eñ, "met potiron ha karat ha netra ken."

"N'eus ket netra arall ebet ?"

"Feiz, nann !"

Ha eñ ha lipat ur banne ivez :

"Met ya !" a lâre-eñ, "un dra bennak arall a zo, sur ! N'eo ket mat !"

"Ne greden ket re lâret, met nann, gwir eo, n'eo ket mat tamm ebet !"

Ha ma maouez da lakaat he fri a-dreist d'he fladad :

"Pouac'h !" eme-hi, "goust esañs a zo, ur spont !"

"Ho ! Ar mañ gast ! Ar bouc'h ! Kompren a ran bremañ ! N'em boa ket netra evit kas ar soubenn deoc'h : an esañs din a oa he lakaat en ur voutailh plastik. Ur bern a zo du-mañ, o lakaat a ran a-gostez. Kemeret em eus unan diñer a bern. Ha sur a-walc'h e oa an hani en doa graet e-barzh e veskad eoul-esañs evit e skoater ! Hennezh a glevay genin, hennezh a dapay e begem !"

Evit e binijenn en doa bet ma c'hensort ur gentel diñer-benn ar surentez er c'han-tinoù, graet get ur plac'h hir he fater ar an divout. Genin en doa bet an absolvenn, ar an diviz da zont hiziviken get ur voutailhad gwin kentoc'h evit get ur voutailhad soubenn Molotov !

Daniel Doujet



**...3 c'hazetenn n'haller ket ober hepto !**

Keit Vimp Bev  
28 Grand rue  
29520 Lœc  
Piqz : 02 98 26 87 12 - Pfr : 02 98 26 80 35

## Dictionnaire des noms de famille bretons

**Albert Deshayes**  
Adembannet eo bet labour Albert Deshayes. Ur 1 000 anv bennak zo bet ouzhpennet.  
Embannet gant Chasse-mariée (45 euro an tamm)

## Al levriou e brezoneg evid ar vugale

**Yann-Envel Kervoes**  
Kinnig a ra Yann-Envel Kervoes ur renabl eus ar skidoù brezhonek evit ar vugale en 20<sup>m</sup> kantved.  
Embannet gant Emgleo Breiz (17,50 euro an tamm)

## Carnets de route, Gwerzioù ha sonioù Bro-Dreger

**Ifig Troadeg**  
Boazet omp bet gant Dastum Bro-Dreger da gavout ingal er stalioù, pladennoù ha levrioù nevez, kinniget bepred eus ar c'hentañ. En taol-mañ ez eo ur pezh levr gant daou CD zo deuet en-maez hag a vez gwerzhet marc'hadmat e gwirionez. Eostad ifig Troadeg a gaver en oberenn, bet e-pad ugent vloaz o welet tud ar vro da zeskiñ diganto. Un afer a garantez evit tud ar vro eo an dastumad-mañ da gentañ, ha neuze 'ta evit o yezh hag o sevenadur.

Kavet en deus ifig Troadeg un doare da drouzsknañ pozioù ar gwerzioù hag ar sonioù a zoui ouzh dibarderioù yezh Treger hag a zo aes da lenn evit forzh peseurt brezhoneger war un dro. Sed aze ur skouer hag a c'hellef bezañ heuleit gant re all.  
Gourc'hennou da ifig Troadeg evit bezañ profet e eostad deomp. Gouzout a ra ne dalvez e deñzor nemet ma vez ran-net gant ar muñs ar gwellañ a dud. Kalz a draoù dastumet a ehom da wezañ embannet. Salvi ma vo heuleit skouer ifig Troadeg. Gant Carnets de route eo aet Priz France 3 ar gwellañ levr brezhonek.

Embannet gant Dastum Bro-Dreger, 380 P. 2 CD. (42 euro an tamm)

## L'eau des multinationales, les vérités inavouables

**Roger Lenglet ha Jean-Luc Touly**  
Un enklask zo bet kaset da benn gant ar skrivagnerien, Roger Lenglet ar c'helaouenner ha Jean-Luc Touly, implijad er CIGE abaoe 1976. "Petra zo kuzh er fakturern dour ? Al levri-mañ a lak war-veur doaroù ober embregerezhioù bras an dour evit lakaat ar vevezteren da baeañ dizehan ha tremen a-us an dilennidi" eme an embanner. Ar raksnid zo sinet gant Danielle Mitterrand.  
Embannet gant Fayard (19 euro an tamm)

## Revezlin

**Niv. 2**  
Tu 'zo kavet en eil niverrenn div atersadenn eus strolladoù : Guarapita hag a zo ur strollad ska-punk parizian, ha Mat Da Lao, strollad punk'n'bass a orn eus Roazhon. Un atersadenn all a c'heller lenn : hini Poch, a ra moull-hivadunioù ha grafou. A-hend all ez eus ur pennadig displegan diwar-benn ar "Black Bloc", hag unan all diwar-benn Red Head Man, a ginnig pladennoù, ska dreist-holl, da breñañ dre lizher. Tu zo ivez lenn keleier, pe "kinnigadennoù" pladennoù, levrioù... 18 pajenn a zo e pep yezh (divyezhek penn-da-benn eo), hag e liv emañ evit an dam-vrasañ.  
A euro kaset dre lizher. Revezlin, 10 annezlec'h Sant Yann-Vadebour ar Sal (résidence Saint-Jean-Baptiste de la Salle), 35000 Roazhon.  
evulzin@free.fr. www.revezlin.net.

# Familh Vick & Vicky

**Soñj hoc'h eus sur a-walc'h eus tri levr bannoù-treset Sorserezed Breselien. Bet embannet warlene hag aet unan eus Prizioù France 3 gant an trede lodenn. Lod ac'hanoc'h o deus graet anaoudegezh gant labour Bruno Bertin d'ar mare-se marteze. Vick ha Vicky a oa bet ganet ouzhpenn dek vloaz zo diwar greion ar Felgerad...**

**P**lijadur. Sed amañ ur gêr a zistro alies e genoù Bruno Bertin. Hag eñ ouzhpenn 40 vloaz bremañ, zo vloaz zo en doa kroget gant e levr kentañ. Skuizh e c'hellfe bezañ emit-hu ? Ar c'hontrol-bev eo ! Koulz hag e harozed simpl, Bruno Bertin zo un den a glask da gentañ reiñ plijadur d'ar re zo tro-dro dezhañ. D'e lennerien ha mignoned da gentañ.

*"Ur familh eo ti P'tit Louis"* eme an treser. *"Ne broduomp ket evit produiñ. Berzh Vick ha Vicky zo ur chañs evit kas raktresoù all war-raok ha reiñ lañs da dreserien nevez"*. Ret eo lavaret eo bet ar bloavezh 2005 unan a-feson evit an embannadurioù P'tit Louis. 150 000 levr bet gwerzhet. Embannadurioù P'tit Louis zo bet ganet e-tro 1990 ha gant ar berzh graet er bloaz-mañ hag er bloavezhioù tremenet ez eus bet tu da enfredañ un implijad evit ober war-dro an dasparzhañ hag ar c'hehentiñ.

## OUZHPENN VICK & VICKY

Meur a zastumad zo gant P'tit Louis en deiz a-hiziv. 16 treser zo bet embannet evit poent, en o zouez treserien nevez evel Mikael, Laurent ha Samuel. Re all a vo ! Ar bannoù-treset n'int ket tout. Romantoù a vo savet diwar istorioù Vick ha Vicky. Ur

filmig bevaat a vo savet ivez... Tu zo da anavezout holl oberoù P'tit Louis war lec'hienn an ti-embann war ar Genrouedad.

## UR BINVIDIGEZH DA LAKAAT WAR WEL

Aet e oa Bruno Bertin da sevel, a-youl vat, al lec'hienn [www.kuzul.org](http://www.kuzul.org), evit Kuzul Sevenadurel Breizh, un toullad bloavezhioù zo. Enni e kinniger roll treserien ha senarourien bannoù-treset Breizh. *"Ur benveg dispar eo. An holl zo kinniget er memes doare, lakaet war memes live. D'ar saloñsoù, embregerezhioù, embannerien, skolioù ha me oar me d'ober o dibab da c'houde... Ul labour talvoudus zo bet graet aze"* emezañ. *"Savet ez eus bet ur gevredigezh,*

*Case 1, evit klask skoazelloù ha yalc'hadoù a-benn adsevel ha nevesaat al lec'hienn."*

## BEZAÑ TOST OUZH AN DUD

Ur gelaouennig digoust zo bet savet nevez zo ivez. *Vick & Vicky Le Journal* : 9 000 skouerenn moulet, a vo kavet er stalioù, el levraouegoù, e Breizh ha pelloc'h c'hoazh. Enni e kinnig skipailh P'tit Louis levrioù ha treserien a bep seurt. *"Gellet a reomp ober kement a draoù a-drugarez da lennerien Vick ha Vicky"* eme Bruno Bertin. Unan eus levrioù pouezusañ rummad Vick ha Vicky a vo troet e brezhoneg gant Jil Penneg : *Aet diwar-wel war Enizenac'h*. En ur c'hortoz e c'hellit heuliañ anezho betek Egipt en o zroioù-kaer nevez, *Sur les terres des Pharaons*.

M.L.

Evit gouzout hiroc'h :  
[www.editionsptitlouis.fr](http://www.editionsptitlouis.fr).



Deuit tre er vojenn !  
EMBANNADURIOÙ P'TIT LOUIS



Grit ur gargad troioù-kaer...



Embannadurioù P'TIT LOUIS  
4, allée Emile Marie Besnard 35000 Rozhon (breizh) 02 99 35 19 86

Evit gouzout pep tra war an dezorien, ar produioù deveret,  
an nevezentioù, an traoù-kaer diembenn, er c'hilab...  
kri diouzhtu war lec'hienn !

[WWW.EDITIONSPTITLOUIS.FR](http://WWW.EDITIONSPTITLOUIS.FR)